

## AR C'HOAREIZ

Nevez ar yuniñ zo deuet, goulou ar pened. Breudeur, savomp diwarnomp pep namn ha kanomp da Roer ar Gculou: Klod dit-Te, Kar-an-den!

*Pergont devezh da yunañ, hemañ eo hon-zreizh da Bask, o terc'hel koun eus perc'hirinded ar Yuzevion dre ar gouelec'h hâg eus yun hon Salver er gouelec'h. An amzer prientiñ an danvez kristenion d'o badeziant en noz Fask e oa gwechall ivez.*

*Un distro d'ar vro eo (kv. hañvaladenn ar Mab foran, Lk. 15, 11-32): harluet ma 'z omp diouzh Doue ez eo dimp klask an hent davetañ, davet ar wir Vuhez, evel ma kaner gant ar salm 136, 1-6.*

Ouzh stêriou Babel, # edomp azez o ouelañ, \* gant ar c'houn eus Sion.

Ouzh an haleg en o zro, \* hor boa skourret hon zelennoù.

Eno e c'houlenne diganimp hon c'haezherion \* komzou ur ganenn,

'Kanit dimp ur ganenn eus Sion', \* eme gwaskerion hon levez.

Penaos dimp kanañ kanenn an Aotrou \* war zouar an estren?

Mar da ankouaan, Yerozalem, \* ra zisec'ho va dorn.

Ra sonno va zeod ouzh va staoñ, \* mard ez eus va c'houn,

ma na savan ket Yerozalem \* e barr va levez.

*Un andro eo ouzh Doue: ha ni war an douar estren, e lavaromp gant ar Salmour: "Pegoulz e welin va Doue, an Doue bev?" Kentañ heberzh ar C'hoareiz eo ar bedenn.*

*Ar C'hoareiz zo hent an adunvaniñ gant Doue. Penedourion ez omp war ar bed, oc'h azrekaat d'hon fec'hedoù. Rak-se, en eil sul ar C'hoareiz, e kofesaomp hon fec'hedoù en ur lavarout ar salm 50.*

*Ar pened zo ar galv da aenez Doue: en em anavezout a reomp evel pec'herion, ma teuy Doue war hon skor. "Grit pinijenn hag androit, eme sant Per, ma vo dilamet ho pec'hedoù" (Ob. 3, 19). A-izel ez anzavomp ez omp pec'herion: "Eus an traoñ e c'halvan warnout, Doue" (Sl. 129, 1).*

*Ersav ar c'hristen en azrek eo hini tellaouer an Aviel — ar "publikan" — (Lk. 18, 9-14): "Doue, bez trugarez ouzhin, pec'her ma 'z on". Kentañ eo anzav ez omp pec'herion, tud nammet war hon gwall, "kontron ha neket tud" (sl. Sl. 21, 7), o fiziout neoazh war drugarez Doue; houmañ eo pedenn ar galon evel ma vez lavaret gant ar Reizhvriaded: "Aotrou Yezu Krist, Mab an Doue bev, bez truez ouzhin, pec'her".*

Eil heberzh ar C'hoareiz eo an drugarez: Trugarez Doue oc'h ober gant pep hini ac'hanomp, anat dimp, evel ma ra ur vamm, gant ma teuer da c'houderiñ ha da c'houlenn digarez outañ.

Hag o vezañ emouezet pouez e bec'hedoù, e c'hell mab-den plaoañ e-unan an drugarez; diwar-henn e sell gant trugarez ouzh kement tra krouet, oc'h heñvelaat e gaton ouzh hini Doue a drugarez: "Ur galon entanet evit ar grouadelezh a-bezh, denion, evned, loened, diaouled, ha kement a zo" (s. Izag Ninevez).

Ersav ar c'hristen zo kontrol da hini ar bed ma kav d'an den "ez eo barrek d'ober pep tra drezañ e-unan". Ouzh stuzegezh al lorc'h (kv. Farziad an Aviel, l.m.) ez eo enebet heberzh an uvelled. An uvelled zo derou an azrek, evel ma lavarar gant trogan ar C'hoareiz:

Digor din dorodoù ar pened, pa 'z out Roer ar Vuhez, rak a-veure emañ va spered, hag eñ nammet a bec'hed, o luskañ ouzh da Neved hael. Dre da vadelezh divent, va glana gant da drugarez. Gra kompes din hent va yec'hedourezh, Mamm Doue, pa'm eus nammet va ene gant pec'hedou hakr o koll va buhez en aroaregezh. Dre 'z erbed, sav diwarnon pep dic'hlan! Diyalav ma'z on, o lakaat va freder gant va gwalloberoù diniver, e teu din spontañ gant ar soñj eus deiz ar Varn. Padal, feiz ennon ouzh da vadelezh ha da drugarez, e c'harman ouzhit evel David: "Bez rad ouzhin, diouzh barr da drugarez!"

Penaos mont uvel? Oc'h arvestiñ ouzh Krist "a zo kuñv hag izel a galon". "O vezañ er skol" gantañ, "e kavfet diskuizh d'ho eneoù". Ouzh den ar bed e taol sant Yann Krizostomos: "Petra eo dit nec'h-iliñ? Bezañ disteraet gant an uvelled? Sell ouzhin (eme ar C'hrist) sell ouzh an holl skouerlòù a roan dit, hag e vo dit gwelout meurded an heberzh-mañ" (war Mzh., 38, 2).

Yuniñ zo kaout naon d'ar C'hrist, evel ur bugel: aze emañ an uvelled. Yuniñ zo en em lakaat e stad da vezañ maget gant Doue. E-kerz ar C'hoareiz, muiget e pep amzer all, eo dimp adkavout hon c'horf evel neved gouezvoud Doue, advevañ an azaouez d'hon c'horf, d'ar bevañs, d'ar vuhez, addeskiñ "ne vev ket an den diwar bara hepken" (Adl. 8, 3; Mzh. 4, 4, h.a.).

Termen ar C'hoareiz zo Pask, eleze kentaat klod ha levez ar Rouantelezh ma 'z omp pedet da vanvez an Oan "en deiz digevnoz".

"N'eo ket diwar vara hepken e vev an den, hogen diwar gement komz o lont eus genou Doue" (l.m.). Ken hon eus soñjet kinnigen niverenn-mañ, war dreuzoù ar C'hoareiz, un toullad testennoù da brederiñ warne.

"En deizioù-mañ e rankomp paouez pell diouzh ar mor ha diouzh tarzhoù ar bed-mañ, evel e porzh ar C'hoareiz, ha degemer al lennadennoù santel e skrin hon c'halon" (s. Kezaer Arles, hom. 196).

Jozeb an Devedad.

## PEDENN SANT EFREM

(a lavarar bemdez e-pad ar C'hoareiz)

Aotrou Doue ha Mestr va buhez,  
gra nad ay ket va spered  
gant an aroaregezh, an diskalon,  
ar vestroni hag ar flistih;

laka e 'z kwaz avat  
ar c'hlanded, an uvelled,  
an habaskted hag ar garantez.

Ac'hanta, ya! Aotrou ha Roue din,  
ro din gwelout va nammoù  
ha na varn va breur,  
pa 'z out benniget  
a holl viskoazh da virviken. Amen.

## DIGAREZAD

en eil sul ar C'hoareiz

Salm 50:

Bez rad ouzhin, Doue, e 'z taioni; \* diouzh barr da drugarez dilam kuit va namnicù.  
Dasgwelc'h va c'hammwez; \* va glana diouzh pep pec'hed.  
Va nammi ez on emouezet outañ; \* e'm enep emañ bepred va fec'h-ed.  
Enep dit da-unan 'm eus pec'hed; \* an droug razout an hini 'm eus graet.  
Kevion e vezez e 'z Kornz; \* ha trec'h cuzh da varn.  
Dre ur c'hammwez m'arvat e voen stummet; \* er pec'hed e oan pa voen goret gant va mammi.  
Ar wirionez a vourrez ganti e bev ar galon; \* e'm c'hreiz e kelennez rinou da furnez.  
Skuilh warnon gant ar sikadez ma vin dinammet; \* va gwelc'h ha gwennoc'h eget an erc'h e vin.  
Gra din froumañ gant ur bonni laquen, \* ma trido an danvez gan-it mantret.  
Ur galon dinammi sav ennon, â Zoue; ur spered eeun lak a-nevez e 'm askre.  
Na'm argas ket diouzhit; \* da Awen C'hlan n'He lam ket diganin.  
Daskor din da yec'hedourezh, \* va c'hreñva gant da Awen riek.  
Me da gelenn da hent d'an namnidi, \* d'ar bec'herion davedout da andreñ.  
Va diwall diouzh ar gwad, Doue, va Yec'hedour, \* ha va zeod a sonenno da gevionded.  
Va Aotrou, digor va diweuz; \* va genou a zezrevello da veuleudi.

Ne vourrez ket gant al lidlazh; \* nag ul lidkinnig a rafen ne ve ket grad dit.  
An aberzh da Zoue eo keuz ar spered brevet; \* ar galon mantret er pri n'he dismegez ket.  
E'z krad gra vad ouzh Sion: \* sav he murioù da Yerozalem.  
Neuze e vo grad dit an aberzhioù-lidet peurvat, \* pa ginnigo estrenion ouzh da aoter.  
Klod ha bri da Zoue: \* Tad, Mab hag Awen.  
Evel ma oa er penn kentañ, m'emañ bremañ, \* ha ma vo da viken. Amen.

*Tro ouzh ar feizidi, en diavaez d'an neved, e lavar ar beleg:*

Doue, hon Salver, pa'c'h eus dre Natan da ziouganer dilamet e namnioù digant David en azrek, ha pa'c'h eus degemeret pedenn geuz Manasez, e'z karantez a-vepred ouzh mab-den, degemer ivez da wizion o keuziañ d'o fec'hedoù ha distro diwarne, Distaoler an namnioù ha Dilamer pep kamniwez. Rak Te, Aotrou, a lavaras: Ne vennañ ket ma varvfe ar pec'her, hegen ma'z androy ha bevañ, hag ur ret eo digareziñ seikent gwech seizh gwech. Evel ma'z eo dic'hoñvor da veurdez, e gwirionez, ez eo divent da drugarez, rak ma rez stad pizh eus an nammoù, piv a c'hello herzel? Pa'z out Doue an azrekeion ha dit e kaner klod, Tad, Mab hag Awen, bremañ ha dalbez, a holl viskoazh da virviken.  
é Amen.

*War-lerc'h pep anzavadenn, e ro ar beleg an absolvenn da bep feizad:*

Yezu Krist, Aotrou ha Doue-ni, da'z tinamniañ dre E rad hag E garantez ouzh mab-den; ha me, beleg divat, dre E c'halloud a zo deroet din, a zistaol diwarnout hag a welc'h kuit da holl bec'hedoù, en Anv an Tad + hag ar Mab hag an Awen.

#### UR STROBAD RAKKANENNOÙ

Merc'her al Ludu:

(Diouganer: Iz. 58, 1-9a; Abostol: Heb. 3, 7-19; Aviel: Mzh. 6, 16-21)

Te a vez e kuzh hon c'halon gant da Gomz ha gant da Awen, ha Te dihewel ouzh azeulerion an diavaezioù. Tri-Unded, Teñzor dreist dimp, Mammenn ar boud, dre da Vab, hon Aotrou, e kelennez dimp yunañ, kuit a dristez evel ar glufaneion, barr a levenez evel bugale dit. Da rad, nikun ne ziraez e lacrezh pa'z en roez, pa'z en dasparzhez, diouzh da drugarez, diouzh da vadlezh, d'ar glaskerion anezhañ. Drezañ e stou dirazout an Aelez, an Arc'haclez hag al Leviazed, ar Veliazed, an Nerzhied hag an Diernazed, ar C'housezed, ar Gerubed hag ar Sarafed, hep krediñ

arvestiñ ouzh da Glod, na distagañ o spered diouzh da Gened dreist-lavar, en ur ganañ dit.

Sul kentañ ar C'hoareiz:

(Diouganer: Yoel 2, 12-19; Abostol: 2 Kor. 6, 1-10; Aviel: Mzh. 4, 1-11)

Dre Yezu Krist, hon Aotrou, delv da Glod, eilskeudenn da Gened kuzh. Ennañ ez eo start o feiz d'ar yunerion, ennañ ez eo kreñv o goubez, ennañ ez eo gwell o c'harantez. Ar Bara bev ha gwirion ez eus anezhañ, dinaouet eus an neñv, oc'h annezhañ atav en neñv-où, o vout solwez an drafadelezh, bevañs an heberzh, Komz digevredus diouzhit, a zo pep tra graet drezañ. En tu-hont da Vara poell mab-den ez eo Bara an Aelez. Maget gant hevelep Bara, en doa Mozez, da waz, yunet pergont nozvezh ha pergont devezh, p'en devoe diganit da Lezenn. Diwar da Gomz e veve, o tioueriñ kement bevañs douarel evit bourrañ gant da guñvelezh. Tra ma'z arveste a-spered ouzh da vadelezh, e tinaoue diganit war e zremm da C'houlou dreist-diraez. Rak-se ne veze darev na gant an naonder na gant ar skuizhder, pa neuzie warnañ da Glod dreist-par, hag eñ leuniet gant da Awen ha maget gant da Gcmz. Teurvez, Aotrou Doue, e-doug ar pergont devezh dimp da yunañ diwar da c'houlenn, daskor dimp hevelep Bara ma vefomp atav en hireazh dit. R'hon santelay E Gorf ha r'hon glanay E Wad da Grist hon Aotrou ez out drezañ meulet hag azeulet gant an Aelez...

Sadorn e Kortualoù ar C'hoareiz:

(Diouganer: Lav. 3, 19-34; Abostol: 1 Tes. 4, 1-7; Aviel: Mzh. 17, 1-9)

A-zerou e kroujout dre da Gomz an neñvoù hag an douar ha dre lusk dreist-lavar da Awen e rojout dezhe boud ha buhez ha, padal, e oa distuz ha distruz an douar. Neuze ez arc'hjout hag eus an islonk e strinkas ar goulou da weleviñ war ar bed. Ouzh e welout e reas meurbet levenez an Aelez ouzh ur gempenn ken dreist da'z oberenn. Hag ez aent gant ar boem an eil re ouzh ar re-rall o taz-lavarout: Sellit furnez an Oberour ha kened an douar nevez-c'hanet eus an netra, koulz ha ni.  
E-kreiz an amzerioù, a-douesk an dud fellet e teñvalded an difeiz, e tilennas da Unvab a garantez, ar Gcmz enkorfet, tri a ziskibion. Gantañ en o c'hemerias ha, dirak Mozez hag Eliaz, degaset en-dro eus skeudoù an amzerioù tremen, e tiskouezas E C'houlou ankrou, Engremm da Zoueelezh, Goulou antennet eus an teñval dre da vennantez c'halloudek, hogen savet eus kendon da Anian. Mab-den, gant e zaoulagad marvel, a welas evel-henn kened da Anian, sked da Glod dreist-diraez, o hentaat ouzh ar grouadelezh d'he c'hlodouezañ ha d'he douelaat, dre an dreistelañ burzhud.  
Barr a voem hag a azaouez, a-unan gant neradoù an Aelez, an

Arc'haelez hag al Leviazed, ar Veliazed, an Nerzhied hag an Diernazed, gant korioù diniver ar C'hoursezed he-sked, ha gant ar Gerubed flamm hag ar Sarafed lieslagadek, ez embann an denelezh da garantez, Tad an doueelezh, ouzh ar bec'herion ac'hanomp, en ur lavarout:

#### Trede sul ar C'hoareiz:

(Diouganer: Ez. 33, 10-20; Abostol: Ef. 5, 1-10; Aviel: Lk. 11, 14-28)

E-korf c'hwec'h devezh e kroujout an hewel hag an dihwel, ha mat e oa da oberenn. Unan a'n aelez avat ouzh da vadelezh a zispac'has hag en teñval e voe stlapet rak e lorc'h. An aerovant kozh anezhañ a stlejas war e lerc'h darn eus goueleier an neñvoù. Tad ar gaou anezhañ a douellas da c'houde Eva, hon mamm, ha, drezi, mab-den yevet gant an diaoul.

Erru an termen, e tavejout da Vab, ganet gant ur Werc'hez en E zenelezh. Ouzh beli Satanaz e reas kann; dre E groaz e voe trec'h warnañ; dre E Zasorc'h e tibourc'has an ifern, o preizañ e armoù, o tivac'hañ e dud ha digeriñ o genou d'ar bobl dasprenet evit kanañ da'z Anv, Trinded hael, en ur embann da rouantelezh.

Dit, Roue trafad, e kan ar Goueleier ankorfel, gant an Nerzhied neñvel ouzh da veuliñ, al luoz speredel ouzh da azeuliñ, kevret gant Mikael an Arc'hael, milour kadarn da santelezh, ha gant Maria venniget, skedusoc'h eget an Aelez, en ur lavarout:

#### Pevare sul ar C'hoareiz:

(Diouganer: Yer. 18, 1-11; Abostol: Gal. 4, 22-30; Aviel, Yn 6, 1-15)

... hon bennozh dit. Hiziv dreist pep tra pand eo nes ar Pask ha barr he bronnoù d'hon mamm an Iliz evit laezhañ an danvez kristenion. Santelaet gant *le'htis* an neñv e lusk an doueier, engorto da adc'henel an dud androet ouzhit, Doue dreist-meiz, dreist-anav, dreist-lavar hag ankemm, Tad santel, trafad hollc'halloudek.

Oberour ha mager an hollvedel, espart eo da furnez o reiñ e vevañs da bep boud en amzer, o kelenn da vab-den gounit ar gwini-izh hag o laouenaat dezhañ e galon gant gwad ar gwini.

Pa enkorfas evidomp da Furnez hag annezhañ en hon zouesk, e tis-kouezas marzhusoc'h traoù: dre rannañ pemp baraenn e vagas pemp mil a zanvez kristenion ken na oa bonaezhet ar boblad.

Hep paouez gant E vuzhudoù, e tegase E ziskibion dre hevelep tro dreist eus E c'halloud doueal da gevinnenn vrasañ E emrouisted hag E garantez ouzh mab-den, da gevuniezh espar E Gorf hag E Wad, da vanvez an Oan Fask o hentaat ouzh an dud ar Vuhez trafad hag ouzh an Iliz E Zoueelezh.

Barr a levenez, e-kreiz o azeul peurbad, e kan dit an Aelez, an Arc'haelez hag al Leviazed, gant ar Veliazed, an Nerzhied hag an

Diernazed, gant ar C'hoursezed, ar Gerubed hag ar Sarafed, en ur lavarout:

#### Pempet sul ar C'hoareiz:

(Diouganer: Yer. 7, 1-15; Abostol: Heb. 9, 4-15; Aviel: Yn 8, 46-59)

Endra vez mein gant daouarnioù hakr da labezañ ar C'hrist, e stlak daouarnioù ar feizidi ouzh ar Roue o vont war-raok evit diskar ha trec'hiñ an ankou er Groaz difaezhidik. Gant korioù an uhel-dadoñez embann ar gristenion a-ziskan laouen ar Mab ganit ganet kent ar bed ha gant Maria en amzer.

Tridal a ra tad ar gredourion gant ar C'hrist o tehentañ ouzhimp E Gomz kreñvoc'h eget an ankou. O oueliañ gant E Gorf E Glod rak-trafadel, emañ hon Salver o tont tre e kev laer hon eneoù evit o diframmañ digant an toueller, o daspren dre E Wad hag o daskor dit, Tad a gevionez. Ouzh henn gwelout e vleuñv Abrac'ham gant al levenez hag e trec'hliid an Emglevad kozh hag an hini nevez, gant an neñvoù hag an douar, leizh gante an amzer hag an egor, o kanañ klod dit en ur lavarout:

#### Sadorn Lazar\*:

(Lennadennou: Heb. 9, 15-28; Heb. 10, 1-17; Aviel: Yn 11, 1-45)

Ya, da eo ha kevion, Tad santel, Oberour ar bed, da veuliñ ha da ganmeuliñ digant pep rev, pep boud, pep hoal, pep stuz ha pep genezh, en amzervezh-mañ a'r C'hoareiz, gant youc'hadennoù ha rifadennoù, en devezh-mañ ma tered an dud a-vostadoù, eus Yerozalem hag eus Betania, en arbenn da'z Mab, o kenembann a-bouez o fennoù: Meuleudi da Vab David! Benniget an Hini a zeu en Anv an Aotrou! Glazet eo an douar traezh, barraouet ha deliaouet, e bri dezhañ; kinklet ha mantellaouet, dindan E dreid, an hent da Yezu, gant an dud dibourc'het evitañ. Hag ar bobl d'ober lid d'an Trec'h-our nevez, ken ez a o youc'hadennoù betek an Templ, pa lavaront: Benniget an Hini a zeu en Anv an Aotrou! Na vez ket aon, merc'h Sion; emañ da Roue o tont, azez war un azenig yaouank.


Hep tennañ war-dreñv rak c'hwez hon nammoù, hon dasorc'het en deus-Eñ gant Lazar, dre zilemel diwarnomp lurelloù ar marv.

Deus en hon zouesk enta ha chom en hon metou d'hon boueta gant da Vara kinniget ha gant da Wad skuilhet evit ar fellidi, ma vo dimp gout e teui ennomp, Gweladenn hon c'halonoù, ha ma vo dimp kerzkout da benn-hent dit, kevret gant Nerzhied an neñvoù, o youc'hal dit ha da'z Tad kendrafad ha da'z Awen c'halloudek, en ur lavarout:

\* Derc'hent sul ar bleunioù a anver Sadorn Lazar, en askont eus Aviel an deiz.

\*\* En deiz-mañ e roed tollad ar Credo d'an danvez kristenion.





Sul ar bleunioù :

*Kent bennig ar bleunioù :*

Klodveuret out en iliziad da sent, gwazvezhet gant da holl grouadurion, ouzh da anaout da Oberour ha da Zoue nemetañ. Kenveulet out gant kement a c'h eus graet, ha benniget gant da holl sent. Anv da Unvab a embannont a-vouezh uhel a-ouez da rouanez ha da levierion ar bed-mañ. Dirazañ en em zalc'h an Aelez hag an Arc'haelez, ar C'hoursezed hag ar Veliazed, gant holl luoz an neñvoù, a-unvouezh o kenganañ ar meulvezh da 'z Anv, en ur lavarout dibaoez.

*En oferenn :*

War-dro dit e ra da grouadurioù, pa 'z anavezont evel o Oberour nemetañ hag o gwir Doue nemetañ. Da veuliñ a ra kement a zo bet graet ganit. Da vennigañ hag embann a-youl-vat a ra ar sent dirak rouanez ha levierion ar bed-mañ, hag embann Anv da Unvab, a zo dirazañ ar C'hoursezed hag ar Veliazed en azaouez, o kanañ gant holl luoz an neñvoù, ar meulvezh da 'z klod o lavarout.

*Yaou Gamblid :*

... ha da 'z Mab, Yezu Krist. E zenelezh en deus hon dastumet, E uvelded hon gorreet, E werzhadenn hon dinammiet. E bean en deus hon dasprenet, E Groaz hon salvet, E Wad hon glanaet hag E Gorf hon maget. E-unan en deus en em roet evidomp hiziv, d'hon distagañ diouzh ar pec'hed. Evit talvezout d'E feizidi meurdez E vadelezh hag E uvelded, n'en deus ket bet prederi rak gwelc'hiñ E dreid d'an treitour, a rakwele an dorn anezhañ korg en e dorfed. Rak-se moarvat, neizhour E dremenvan, e keffleunias a-youl-vat kefridi ar mevel o tiwiskañ E vantell, p' en doa emgoazhet E-unan an Hini a oa en E renk a Zoue. Rak-se moarvat e stagas ul lianenn en E dro, pa zeuas e renk ar gwaz e-touez an dud. Rak-se moarvat e skuilhas dour en ur billigenn da welc'hiñ o zreid d'E ziskibion, pa skuilhas E Wad evit skarzhañ nammoù ar bec'herion. Rak-se moarvat e sec'has o zreid d'ar re en doa gwelc'het gant al lianenn en E dro, pa wiskas ar c'hig evit reiñ nerzh da hent an Avielerion. Evel ma tiwiskas E vantell kent lakaat al lianenn en E dro, en em c'houlloas pa wiskas furm ur gwaz ; ne ziwiskas ket ar pezh en doa, hogen degemer ar pezh n'en doa ket. Evit E groaz-krougañ, e voe dibcurc'het ; marvet, e voe gronnet gant lianenn-où ; hag E Basion en he fezh a c'hlanas ar feizidi. Kent dezhañ gouzañv, e tiskouezas preveudi E vadelezh, ken ouzh ar re a dalvezfe E dremenvan evite, ken ouzh an Hini a oa d'E werzhañ d'ar marv. Ken meur eo uvelded mab-den ma vez kemennet dre skouer meurdez Doue. Da viken e oa kollet lorc'h mab-den, paneved d'an Doue uvel dont d'e glask ; paneve d'an den kollet gant e doueller bezañ salvet gant izelegezh E Salver a garantez. Rak-se ez out kenveulet gant an Aelez hag an Arc'haelez o kenganañ holl a-unan.

**Kenvod ar Sadorn meur :**

... hon bennozh dit, o kanañ dit meuleudi, o kinnig dit hon roadoù, oc'h embann da drugarez, Tad hollc'halloudek, Doue trafadel. Meur ez out ha burzhud eo da oberoù, à Zoue nemetañ! Te a grouas gant poell an neñvoù; Te a struzhas an douar war an douerier, a stuzias ar c'hannedoù meur, an heol da ren war an deiz, al loar hag ar stered da ren war an noz; Te hon greas hag ober da zaouarn n'en dilezez ket. Dit eo an deiz, dit eo an noz; en deiz, e taveez da drugarez, en noz, e tiskouezez da vadelezh a lider hiziv gant derc'hent ar gouel sked-mañ. Emañ o tostaat an Noz, test eus kevrinoù da Yec'hedourezh, an Noz ma 'z eo deroet an drugarez d'ar bec'herion, ma 'z eo graet eus an den kozh un den nevez ha ma 'z adc'han eus ar stivell hael ar grouadur nevez. Emañ o tostaat an Noz ma 'z eo engehetet ar broadoù da vezañ adc'hanet evit deiz an drafadelezh, ma tiserr he dorioù rouantelezh an neñvoù ha ma 'z eo klodouezet an traoù denel dre wered Doue. Emañ o tostaat an Noz espar ha trugarleun ma 'z eo barr ar burzhudoù ennomp dre da oberoù, an Noz ma tigor an ifern e zorioù, an Noz ma 'z eo digarezet Adam, an Noz ma 'z eo adkavet an drakm kollet, an Noz ma samm ar Bugul mat an dañvad danket war E zivskoaz, an Noz o verkañ drouziwezh an diaoul ha sav hon C'hrist, Heol ar gevionez anezhañ, ha ma 'z eo freuzet e ereoù d'an ifern, forzhet ar c'harc'harioù, ha ma teu lies a sent en o c'horfocù diveziet, tre er Gêr santel. Gwenvidiket un Noz, e gwirionez, an Hini a ouvezas ar c'houlz hag ar pred ma tasorc'has ar C'hrist, an Noz ma lavar ar Salmour anezhi e skedo muiget an Deiz, an Noz ma stummi an Dasorc'h evit an drafadelezh. Rak se ez out embannet gant krouadurioù an neñv hag an douar, gant an neñvoù, an douar hag an ifern, ha gant korioù diniver an aelez, o lavarout dibaoez.

Dirak da Groaz (e-lec'h an Triqehael, 3<sup>e</sup> sul ar C'hoareiz)

Di-rak da Groaz, Aotrou, e stou-omp az-aou-ek, ha da Zorc'h sant-el a veul-gan-omp laou-en.

**MEULGAN AR BASION**

Ar banniel zo lakaet er vann,  
Kevrin ar Groaz a lugern splann;  
Roue ar Vuhez zo marvet,  
Ar Vuhez gant ar marv ganet.

An houarn kriz ha didruez  
En deus gouliet E gstez;  
Dioutañ dour ha gwad a ver  
Da welc'hiñ namm an den pec'her.

Peurc'hraet eo Komz an dijougan,  
Kemennou David en e gan,  
D'ar broadoù pa lavare:  
Dre ar prenn e reno Doue.

A wezenn flimin er da sked,  
Kinklet gant gwad Roue ar bed,  
Koad dibabet 'vit degemer  
Izili hael hon Salver.

A Groaz benniget gant ar bec'h  
Ze bet a-skourr ouzh da zivrec'h,  
O pouezañ Korf glan hon Doue  
A lam diouzh an droug e zanzez.

A Vammenn yec'hed, o Trinded,  
Bez kanmeulet gant pep spere;  
Dre ar Groaz Te a ro an Trec'h,  
Ro dimp largentez an divec'h. Amen.

**SUL AR BLEUNIOÙ**

Meulgan:

Klod ha meul- eud- i \* a gan- omp dit-Te, Krist Rou- e, hon

Salv- er, Te a 'c'h eus klev- et bug- al- \* e o kan- añ dit-

Te sed- er.

\* Diwall ouzh an ton !

1. Warnomp-ni out Roue, Da Zavid ar Mab leun a vri;  
Te 'zeu en Anv Doue, Roue benniget dimp-ni.
2. Klod dit e barr an neñvoù, Digant rummadoù an Aelez;  
Mab-den a gas dit kanoù, Ha pep tra krouet ivez.
3. Gant barroù palmez ouzhit, E teu poblad an Hebreed;  
Gant hon c'han ha gant hon lid, Setu ni ouzhit kevret.

4. Te oa war dreuz da c'houzañv, Pa zegasent o meuleudi ;  
Dit o ren en neñvoù bremañ, Sed ar c'han diganimp-ni.
5. Plijet oa dit o ro/ad, Hon fedennoù bezent dit grad ;  
Roue mat, Roue peurvat, Te a gar kement 'zo mat.

#### AR YAOU GAMBLID

*Diskan* : E-lec'h m'emañ ar Garantez, erc 'mañ Doue.

1. Unan ouzhimp Krist en deus graet E garantez.  
Ra vo ganimp en E gevret, al levenez.  
Uvel ra vimp gant karantez ouzh hon Doue.  
A greiz kalon karomp ivez 'n eil egile.
2. Pand omp bremañ holl unanet dre garantez,  
Gant nep disrann en hon spered, bevomp bemdez.  
Dizemglev, trouz ha kasoni, na vezent mui ;  
Hag en zouesk bezet devri hon Doue-ni.
3. Gant ar sent aet tre er gwenved, en didermen,  
Bezot dimp holl gwelout da sked, da virviken.  
Dispar ha divent levenez, dimp da neuze,  
Tre gant an amzer diziwezh gant Mab Doue. Amen.

Lidkerzh d'ar baradoz :

*(Meulgan kempennet diwar al latin Ponge, lingua, kv. abEnnez,  
Barzhoc'hud ur Gwenedour, emb. Gwenedour 1966, p. 72-73)*

Laouen, gou/ennad dilennet,  
Kas kemenn, kenel santelaet,  
Eus hon Dasprener, Roue 'r bed ;  
Sav da ganenn c'hlan, entanet,  
'Vit E bediñ, hep aon, bepred ;  
Gant E harp, rec'h ouzh ar pec'hed.

Izili ha lor, ra vimp skoret  
Gant ur Sakramant ken c'hoantaet :  
Dre c'hred sakret ar Spered Glan,  
Korf Mab Doue ha 'n Den ganet  
Derc'h gant ur verc'h en he gwerc'hted  
D'hon selvel ha mervel aman.

Nez ar Yaou-Gamblid kent sammañ  
Bec'h hon pec'hed d'e zasprenañ,  
'Setu va C'horf hag ho mago',  
Eme Yezu gant karantez,  
En ur sevel E ved nevez ;  
Laesiad meur Pask hcn feurbasko.

En hon c'halon, e gwirionez,  
'Had a-rad Korf ha Gwad ivez  
Bevañs burzhodus ar Vuhez,  
Dan bara ha gwin, kevrinod  
Santel a dreant hcn ski/antoù :  
Boued espar gant E garantez.

Ouzh ken santel ur Sakramant,  
Stouomp leal a galon drant ;  
Lid kozh ec dit mont kuit neuze  
Ha tevel evit an nevez  
Ma talvez bemdez test hon feiz  
Pa vez laezh aze hon c'haezh meiz.

Tad Anganet, Mab Unganet,  
Spered-Sant Awen C'hlan meurbet,  
Klod, enor, ha bennozh ha bri.  
Laouen er bed-man, er gwenved,  
Da viken hep si d'an Drinded  
D'he azeuliñ ha d'he meuliñ. Amen.

#### SALMOÙ ILIZEK

a ganet evel pevare salm evit ar gousperoù.

Pevare sul ar C'hoareiz :

Kefleuniet eo komz David # ha ni oc'h azeuliñ e gwir skabell treid  
dinamni hon Salver ; \* ouzh skeud da eskell, a Groaz, ez omp barr  
a c'houbezh.

Louc'het warnomp Goulou da Zremm, Krist dasorc'het ; \* savet  
nerzh da dud dre c'hoursav da Groaz dreist, a Grist.  
Hiziv emañ savet e-kreiz an douar gwezenn ar Vuhez, plantet er  
C'halvar # ma c'houezas Roue ar rouanez hon yec'hedouezh  
warni ; \* a Zoue, klod dit-Te.

Kroaz skedus dre ar stered, # anadet out evel un arouez trec'hlid  
ouzh ar C'haezar ; \* ha gant e vamm Helena ez out lakaet da  
vragerez an hollved.

Gant prenn an arc'h e voe salvet un tiegezh ; # gant prenn ar  
Groaz ez eo salvet an denelezh a-bezh, \* o freuzañ dorioù an if-  
ern hag o rakkemenn an Dasorc'h.

O sevel war ar Groaz, Aotrou, 'c'h eus dedennet dre da garantez  
divent # Reter ha Kernog, ar c'hantarvestiñ hag an trugareziñ, \* o  
tiskar moger an disrann.

Dre da Groaz, Aotrou, e treantez an ifern hag an neñv, # en is-  
lonk e tinaou ar Goulou ha dreist d'an neñvoù ez eo gorreet gou-  
enn Adam, \* o tigeriñ dorioù an disrann.

O c'hoursevel da Groaz, Aotrou, ez anavezomp an hed, al lod, ar  
sav hag an don, # peder ment Karantez ar C'hrist e kefleunded da  
Rad ; \* a Zoue, klod dit-Te.

Pempet sul ar C'hoareiz :

Sellit ha sellout : kent da Abrac'ham bezañ, Me zo ; # Me zo an Doue a zo kent da bep tra bout, \* kent d'an neñv ha d'an douar re-vout.

Me zo holl en Tad, # an Awen zo ennon ; \* pep tra a zougan, drez-on emañ pep tra.

Dre va C'homz e voe sonnet an neñv hag an douar ; \* azez edon gant an Tad.

Ganet diangerzh, # Me zo E Gomz, E Furnez, E Nerzh hag E Zelv, \* o werediñ gantañ hag eveltañ.

Piv a reizhas an amzerioù ? Piv a savas ar c'hantvedoù ? # Piv a oar remz ar vuhez ? \* Piv en deus ragaozet ha defiñvet pep tra ?

Piv eo Hemañ ? # An Hini anderou zo dalbez ouzh an Tad evel ar bann er goulou, \* Me, E Vab hag E Gomz.

Divent da vadelezh ouzh an dud, â Yezu ; # en oabl 'c'h eus desk-et dimp anaout ar c'hefleuniañ.

Petra bennak ma 'z eo kuzh ar c'houlz, # dimp e roez anaout fraezh \* e ragarouezioù.

Pep tra a ouzout, # pep tra a anavezez, â Yezu, \* pand eo ennout ont doueel holl vriegezh an Tad.

Hag ennout emañ an Awen en he fezh, \* an Awen kendrafad gant an Tad.

Tiern hag Aotrou, Oberour ar c'hantvedoù, # gra dimp bezañ a-vat da glevout ar vouezh santel \* o c'hervel re zilennet an Tad da Rouantelezh an neñvoù.

Trinded anderou hag ankrou, Unanad dizisrann, # Tri en Unan, Tad, Mab hag Awen, Doue nemetañ, \* dit ar meulgan diouzh hon zeodoù pri evel digant genou tan.

Evel teltenn Doue ez out anadet, â Werc'hez, \* p'en deus Roue an neñv annezet ont korfel ennout.

Diouzhit ez eo deuet, leun a rad hag a wirionez, \* o vezañ ad-c'hanet ont doueel mab-den emañ.

Trogan sul ar bleunioù :

Kent da Basion, Krist-Doue, e soliez hon feiz er c'hendasorc'h, pa savez Lazar eus an ankou, Rak-se, evel bugale, e tougomp arouezioù da drec'h ha dit, Trec'hour ar marv, e kanomp : "Meuleudi e barr an neñvoù ! Benniget an Hini a zeu en Anv an Aotrou !"

Pennsonenn :

En neñv out war ur goursez, â Grist ; a-lizel e teuez war un azen-ig. Meuleudi an Aelz a zegemerez ha kanoù ar vugale o youc'h-al : "Benniget out, pa zeuez da adc'hervel Adam eus ar bez".

TEIR HANVALADENN AN DRUGAREZ

(Lukaz 15, 1-32 : an dañvad dianket ; an drakm ezaouet ; ar Mab foran)

*Piv ac'hanoc'h, dezhañ kant dañvad, mar deu da goll unan anezhe, na lez ket an naogont-nav all er gouelec'h, evit mont da glask an hini kollet ?*

Abretoc'h e oa bet dit deskiñ pellaat diouzh al leziregezh, ñzarbenn ar vorgantez, gounit an emroustet, dieubiñ diouzh traou ar bed-mañ, prizliout ar pezh a zo trafad diouzh ar pezh a dremen. Pa n'hell ket avat gwanded mab-den derc'hel start en ur bed ken rampus, en deus ar mezeg mat diskouezet al louzou ouzh ar fazi, n'en deus ket nac'het ar barner trugarek goubez an digarez. N'eo ket hep abeg neuze en deus sant Lukaz kinniget lerc'h ouzh lerc'h teir hañvaladenn : an dañvad dianket hag adkavet, an drakm ezaouet hag adkavet, ar mab marvet hag advevet, evit ma rafemp gant al louzou triek-mañ da brederiañ hon gloazioù. Piv eo an tad-mañ, ar bugul-mañ, ar vaouez-mañ ? Ha n'eo ket Doue an Tad, ar C'hrist, an Iliz ? Gant Krist, sammiet warnañ da bec'hedou, ez out douget en E Gorf ; gant an Iliz ez out klasket ; gant an Tad ez out degemeret. Evel ur bugul e 'z tistro ; evel ur vamm e 'z klask ; evel un Tad e 'z kwisk. An drugarez, da gentañ, ar skor da eil, an adunvaniñ da ziwezhañ. Pep munud a zere ouzh pep hini : an Dasprener a skor, an Iliz a aenez, an Tad a adunvan. Hefvel eo Trugarez Doue, disheñvel ar rad diouzh hon dellidou. Distroet eo an dañvad skuizh gant ar bugul, adkavet eo an drakm ezaouet, war e giz e teu ar mab davet e dad, oc'h azrekaat war ar fazi en deus keuz dezhañ. Kaerat ur gomzenn evit se : *Den ha loen a ziwallez, Aotrou (Sl. 35, 7)*. Bezomp laouen neuze evit an dañvad, bet kollet en Adam, hag adsavet e Krist. Divskoaz ar C'hrist zo divrec'h ar Groaz : eno eo bet lakaet va fec'hedou, war gouzoug uhel ar groug-mañ 'm eus paouezet.

()  
N'eo ket dibouez e rafe levezet ar vaouez-mañ, p'he deus adkavet he drakm. N'eo ket un dra dister eo an drakm-mañ, warni skeudenn an tiern. Rak-se delv ar Reue zo pinvidigezh an Iliz. Deñved ez omp : pedomp-Eñ d'hon c'has d'an dour o frealziñ ; deñved ez omp, goulennomp peurvanou ; drakmcu ez omp, miromp hon zalvoud ; mibion ez omp, redomp davet an Tad.

Arabat nec'hiñ, na p'hon defe foetet gant an traou douarel danvez ar vriegezh speredel hon eus bet. Peogwir en deus an Tad roet d'E Vab an teñzor a oa en E gerz, ned a ket pinvidigezh ar feiz da hesk. Kaer dimp bezañ roet pep tra, pep tra a biaoer, pa na goll ket ar pezh a roer. Na zouj ket na 'z tegemerfe ket, rak "Doue ne ra ket levezet gant koll ar re vev" (Furn. 1, 13). En arbenn dit emañ o tont ; war da gerc'henn e stou ha reiñ dit ur pok, gouestl E denerded hag E garantez, lakaat a ra reiñ dit dilhad, gwalenn ha botou. Dismeg a zoujez, da vriegezh a zaskor dit ; rak ur c'hastiz e nec'hez, ur pok a ro dit ; rak un tamall e 'c'h eus aon, ur fest a laka ober.

s. Ambroz, war Aviel sant Lukaz, 207-209 ; 211-212.



## KOAREIZ MEUR REIZHVRIAT

Derou ar C'hoareiz : .....	13 meurzh
Merc'her al Ludu : .....	15 meurzh
Iñ sul ar C'hoareiz : .....	19 meurzh
Sadorn Lazar : .....	22 ebrel
Pask. Dasorc'h ar C'hrist : .....	30 ebrel

\*\*\*\*\*

Digatez a c'houlenner evit an niverennoù 11-13. Chanet eo chomet hon skrivetez ha ranket hon eus ober gant an hini gozh. Eben zo bet kaset da ratreañ.

Bennozh Doue da gement hini en deus skrivet dimp ha dreist-holl d'ar re o deus perzhiet er mizoù-kas o tegas un dornadig timbroù. O vezañ n'eus koumanant ebet d'an embannenn-mañ e ranker gouzout piv zo dedennet ganti diouzh piv n'eo ket. Hiviziken ne vez kaset nemet d'ar re o deus diskouezet ez int dedennet ganti. Laouen e vimp o kaout anvioù ha chomlec'hioù tud a c'hellfe bezañ dedennet ganti. Bennozh Doue d'an holl!

Ar sekretour.

\*\*\*\*\*



\*\*\*\*\*

Mouladeg prevez dre luc'heilañ. Sekretour : Jozeb an Devedad.

Iliz reizhvriek. 4, alez ar Baelan, Lokmikael-an-Traezh 22300 Lannuon

\*\*\*\*\*